



# G U E R Z

82

## VAR BUEZ SANT ROC,

734 a

*Evit e bedi da implori graç Doue da deurel eur zell a vizericord varnomp, ha d'hon delivra diouc'h ar C'holera maleürus, pehini a zistruch hor brô baour en eur fêçon horrubl meurbet.*

Var ton Christ bras ar Vur.

**T**OСТАIT oll Bretonet demeus a bep andret,  
Gant calz a attantion hac eur galon mantret,  
Evit selaou ar Vuez a Zant Roc ar Merzer,  
Ha disqi dont d'er pedi dre oll en peb qartier.

Ebars er bla daouzec cant eiz ha pêvar-uguent,  
Er guær eus a Montpellier, evit rêi da entent,  
E c'henas ar Zant bras-mâ dre ar c'hraç a Jesus,  
A voe, hac én yaouanqic, eur güir squer a vertus.

D'an oad eus a uguent vla en devoe calonad,  
Rac coll a eure neuze hac e vam hac e dad;  
Lezel a rejont gantàn nombr bras eus a vadou,  
Mes qementse ne rê mann d'apesi e ganvou.

Ar Zant bras-màn a glasqe eun heritach caeroc'h,  
A blije mui d'e galon, dre m'oa preciusoc'h:  
Distribui a eure e vadou d'ar beorien,



Hac e renonças qerqent d'an oll bompou terrien.

Neuze en em deguizas evel eur pelerin,  
 Hac e qemer en secret bent Rom hep nep chagrin,  
 Evit mont da visita beziou an Ebestel  
 Sant Pêr ha Sant Paul placet en o ilis santel.

Pa êruas en eur guær hanvet Aquapendant,  
 E clêvas voa ar Vocen eno horrublamant,  
 Pehini a rê mervel calz a dud a bep oad,  
 Ar pez a rê spouroni hac a sclassé ar goad.

Presset gant an dezir vras da vont da asista  
 An dud qèz-se afflijet, ha da sacrificia  
 E vuez en exerciç ar garantez vrasàn,  
 En em lacas gant fervor da ziconr an dud clàn.

Dre ma voa c'hoas qer yaouanc, voe deàn conseillet  
 Nonpas en em exposi qementse d'ar c'hlénvet;  
 Mes nobstant ma vouie mat e voa qer danjerus,  
 E sicoure mui-ouz-mui an dud clàn maleürus.

Ah! emean, pez boneur a ve evidon-me  
 Dont da ur bloa varnuguent d'èchui va bue,  
 Dre garantez vit Jesus a roas e hini  
 D'e dri blavez ha trêgont evit dont d'hor salví!

Mes Doue a venigas eur garante qer bras,  
 Ha dre bedennou Sant Roc ar Vocen a cessas;  
 Ar yec'hed qer precius a rên dre oll en qær,  
 Ma red ar bobl oll en foul d'adori hor Zalver.

O vea clêvet neuze penos voa ar Vocen  
 O tistruj horrublamant ar guær eus a Ceseen,  
 E redas da gass sicour di gant ampessamant,  
 Gant ar gouraj en devoe en qær Aquapendant.

E bresanç hepquen neuze a chasse ar c'hilénvet,  
 Ha dre e c'hraç voe qerqent Ceseen preseruet;  
 Diredet rêt da velet ar pelerin santel:  
 Meur a hini a zônje penos e voa eun Æl.

Eus a Ceseen neuze en Rom en em rentas  
 D'ober e zevotion gant fervor meurbet bras;  
 Ha qerqent e partias, o vale diarc'hen,  
 Ha n'en em veve bepret nemet dre aluzen.

Rentet e bars en eur c'hoad, en em zantas clàn bras,  
 Hac e rancas arrêti eno var ar yêot glas;  
 Mes Doue a bermettas ma yè eur c'hi bemdez  
 Da gass deàn eur bara da zouten e vuez.

A bars eur pennad goude en e vrô voe rentet,  
 Mes e zillad voa qer paour, e visach qer chenchet,  
 Ne voe qet anaveet a grenn gant eun nep den,  
 Hac evel eun ispion en arrêti jot souden.

Neuze prest d'ar gouarner ractal e voe casset,  
 Pini voa eont deàn, mes n'en anaye qet:  
 Goulen a ra e hano hac a bez brô e voa;  
 Mes dre güir humilite ne respontê netra.

Sant Roc n'en devoa qet c'hoant bea anaveet,  
 Ha ne c'houlennie bea nemet humiliet;  
 Ne glasqe nemet souffranç, humiliation,  
 Hac e voa leun eus a joa p'oe casset d'ar prison.

Laouen ouz en em velet er sêçon-ze trêtet  
 E bars en e vrô memes hac ivez prisoniet,  
 Ne heane nôs ha deiz en eur bedi Doue,  
 Hac e cave e yoneur en e gaptivite.

Hac evel pa ne vije qet an devalijen

Ha diezamant e brison suffisant d'e anqen,  
 E pratique c'hoas varnàn a bep seurt tourmantchou,  
 Evit plijout mui-ouz-mui da Roue an êvou.

Anfin, p'en devoe souffret gant calz paciantet  
 Er prison an tevalla epad pemp bla bepret,  
 E varvas enni er bla trizec cant ha trivac'h,  
 Da bêvar bla ha trêgont, eur C'hrist en e zivrac'h.

Neuze, goude e varo, e voe anaveet  
 Dre eur merc en d'oa varnàn aboe ma voe ganet;  
 E eont a lacas sevel d'e enor eun ilis,  
 Hac e c'halvas bêleyen vit ober an ofiç.

Gant calz a solanite en nombr eus a vroyou  
 E celebrer gouel Sant Roc dre a bep seurt vœuyou.  
 Ar zeitec eus a vis Eost ê fixet ar gouel-ze:  
 Bezomp soignus, christenien, d'e observi ive.

E bedi rêr d'hor prezerv oll demeus ar Vocen  
 A zoug dre oll an distruch etouez ar gristenien.  
 Pedomp-én ta, Bretonet, da zont d'hon delivra  
 Diouz ar C'holera-Morbus zo o rên er vrô-mâ.

FIN BUEZ SANT ROC.

### R E F L E X I O N.

Pa ve eur c'hléved benac oc'h attac ac'hanomp,  
 E reomp hon oll bossubl d'en tec'hel diouzomp;  
 Qemer a reomp pep soign da zifen hor c'horfou;  
 Mes ha ni ra qement all evit hon eneou?

Preciussa tra gouscoude ez ê sur hon ene,  
 Hac evit e zavetai e tlefemp sònj nôs-de

Penos hor c'horf ne bado nemet nebeut amzer,  
Mes hon ene eternal a dle douj hon Zalver.

PEDEN DA ZANT ROC.

O Doue ! c'houi pebini oc'h eus bet promettet  
Da Zant Roc, ho servicher, pa vije invoqet,  
Delivra peb güir gristen scöet gant ar Vocen,  
Sellit a drue bremàn eus an oll gristenien !

PEDEN DA ZANT SEBASTIEN.

O Doue oll-galloudus ! ni ho ped dre veritou  
Ar merzer Sant Sebastien da zelaou hor c'hlê mou :  
Bezit mizericordius hirio en hon andret,  
Ha grit eus ar C'holera ma vimp oll delivret.

PEDEN DA ZANTEZ BARBA.

O Doue oll-buissant ! c'houi pini' c'heus choaset  
Vit hor c'honsolatourez Santez Barba beniguet,  
Deurvezit hor prezervi demeus ho teir goalen :  
Ar Brezel hac ar Guernez hac ive ar Vocen.

LITANIOU EN AMZER AR C'HOLERA.

Jesus eus a Nazareth, Doue carantezus,  
Tec'hit, m'ho ped, divarnomp ar C'holera-Morbus.  
Doe cren, Doue puissant, Doue a vadelez,  
Ho pet true diouzomp, ni oll, pec'herien qez !  
Santez Mari, Mam Doue, concevet hep pec'het,  
Ho madelez infinit hor protejas bepret :  
Deurvezit, ni ho suppli, sicour oll ac'hanomp,

128

Hac enpad ar C'holera caout true diouzomp.

Sant Joseph, Santez Anna, sent Eles-Gardien,  
Sant Roc ha Sant Nicolas, ha Sant Sebastien,  
Ni ho ped a vouir galon da bedi evidomp,  
Evit deus ar C'holera preservi ac'hanomp.

Sant Charles Boromee, Sant Frances-Xavier,  
Santez Angel, Sant Viçant-Paul, bezit en peb amzer  
Hon Advocadet puissant etal Roue an trôn,  
Hac er pedit da rêi demp pep consolation.

Itron Varia ar Vur, Patronez Montroulez,  
Sant Caourintin, Sant Euzen, Sant Pol, ho pet truez  
Ouzomp, Breizis maleürus, zo qer bras glac'haret  
Gant ar C'holera eüzus en hor brô digouezet.

*REFLEXIONOU.*

O qer eus a Vontroulez ! penos oude goasqet  
Gant ar C'holera horrubl hon rent oll glac'haret :  
Pepini evit e dud a zo en hirvoudou ;  
An oll a zo consternet en glac'har, en canvou.

Tadou, mamou, bugale, breudeur ha c'hoarezet  
A zo scõet d'ar maro ebars creiz o yec'het.  
Ar C'holera a ziscar an dud eus a bep oad :  
O pebes calamite ! ô pebes calonad !!!...

O brô a vouir Gristenien ! ô brô qer eus a Vreiz !  
Ar C'holera maleürus zo eta en da greiz !  
Doue ! a vizericord ! ô Majeste divin !  
Ni implor ho madelez, stoüet var hon daoulin.

Ova Doue ! pegueit zo hor boa oc'h ancouët !  
Ne voamp a greñ occupet nemet a draou ar bed.

Ret e voa-ta d'ho coalen donet d'hor c'hastia  
 Vit hon laqat da ober hon dever er bed-mâ!

Ne velet dre bep contre nemet direligion,  
 Ne rene mui en hon touez nep seurt devotion:  
 Mes ar voalen a gastiz zo gant Doue lancet,  
 En deus qerqent pulluhet orgouill an insancet.

Den vên, leun a aroganç, stou da benn orgouillus  
 Dirac ar merc patant-màn eus a goler Jesus,  
 Petra ez out-te bremàn gant da oll vombançou?  
 Eur zell hepqen a Zoue a fraill da c'brandeurion.

Mes sell madelez da Vestr, ha dired etrezàn;  
 Pardon a ra demp oll qement zo eneptàn:  
 Demp eta d'en implori ouz treid e auterion,  
 Evit obten ar pardon demeus hor pec'hejou.

O pebes caer chenchamant a velomp-ni hirie!  
 Er c'hæriou ha var ar mèt coulz hac en pep contre,  
 Oll, ha paour ha pinvidic, carguet a vadelez,  
 Evit sicour gant ardor pep den en dienez.

Ar pinvidic a veler o visita ar paour;  
 Ne espern, vit e zicour, poan, na dillad, nac aour;  
 Hac nep aon da vea scòet ive gant ar Voëen,  
 Ne velont dirac dêze nemet breudeur christenien.

Ar paour, demeus e goste, en defot a arc'hant,  
 A zo nôs-de o soigni e vreur qèz languissant:  
 Anfin, an oll zo douguet, gant eur galon dener,  
 Da zouguen pep seurt sicour d'ar paour en e vizer.

Sellit hon oll vèleyen, güir vinistret Doue,  
 Epad an de hac an uôs e maint oll var vale,  
 O redec en pep quartier, gant güir devotion,

Da gass d'an oll glànvourien sicour ar religion.

Admiromp amàn ive courach ar seurezet,  
Pere cuntinuelamant zo o redec bepret  
Evit mont da zoulaji en pep ty an dud clàn,  
Hep gemeret eur moment da zont da heanàn.

Sònjomp ive e soign vras an autoriteou,  
O deus ar brassa sourci eus an oll ezomou;  
Oll ez int leun a gourach evit sicour pep den  
A ouzont en paourte, pe clàn gant ar Vocen.

Admiromp oll, christenien, ebars en hor maleur,  
Humanite an oll dud unanet vel breudeur!  
Graç ma cuntunuo bepret eur seurt madelezou,  
Evit m'en em rentimp oll dign demeus hon Autrou.

Tec'hit eus al levriou fall zo, gant estranjourien,  
Distribuet en ho touez, Breizis, güir gristenien,  
Pere ne offront nemet maximou danjerus,  
Traou infam, a zo control da lezen sacr Jesus.

Gant eur galon güir sincer, goulennomp ouz Doue  
Ma en em rentimp oll dign demeus e garante:  
En em brosternomp ouz trêid Croas hor Zalver Jesus,  
Da c'houlen ma laqay fin d'ar C'holera-Morbus.

F I N.



*Propriété de l'Auteur.*

---

E Montroulez, eus a Imprimeri LÉDAN. — Qerzu 1849.